



Peskig arc'hant

Kanaouenn skrivet gant Naig Rozmor

Diskañ

**Peskig arc'hant, peskig glas,
O neuñ `barzh ar mor bras,
Lavar din `ta, pelec'h out bet,
Ha petra `peus gwelet ?**

Me am eus graet tro ar bed
,n ur c'hoari gant ar stered
A gustum sellet en dour
Evel en ur melezour

Foñs ar mor a zo livet
Gant kaerañ livioù krouet.
Ar bezhin eo hor bleunioù,
Ar c'hregin hor bravioù.

Peskig, me'yelo ganez
Da dañva da levenez.
Ebatiñ mintin ha noz
,dle bezañ ur baradoz.

Faziañ a rez , bugel,
Du-mañ ivez `z eus brezel.
Ar re vihan gant ar re vras
'zo bet lonket a-viskoazh.

Guitar :

Diskañ

Re lam re lam re lam re re

Fa do re lam re lam re re